



Ar Redadeg

Emvod meur dreist-ordinal ar Redadeg 17-12-2016

Rentañ-kont emvod-meur dreist-ordinal ar Redadeg

d'ar 17 a viz Kerzu 2016 e Karaez

Réunion extraordinaire du 17 Décembre 2016 à Carhaix

Perzhidi / Participants

28 den a oa en emvod, en o zouezh 22 voter.

Perzhidi : Jean-Michel Sanner, Korin Rotach, Bernez Kere, Laure Vandenbroucke, Fabienne Lavigne, Loig Jade, Fulub Kere, Jerald Ar Gov, Virginie Louvion, Laure Alart, Kenan An Habask, Marc Le Boite, Berc'hed Kallag, Leila Simon, Maze Bergot, Yann-Ildut Galliou, Nathalie Diallo, Gwendoline Jezequel, Lors Calippe, Mathieu André, Christian Guidoux, Stéphanie Stoll, Soazig Plantec-Rouzic, Morgan Campion, Jean-Christophe Chorlay, Anne-Sophie Calloc'h, Frederique Huet, Katelin al Lann.

Digarezet : Mael Thepaut, Maiel Yvon, Denez Pichon.

Burev an emvod : Jerald ar Gov, Fulup Kere, Leïla Simon, Berc'hed Kallag, Jean-Michel Sanner

An emvod-meur a zo bet savet evit votiñ cheñchamantoù statudoù. 3 c'hinnig a oa bet graet :

Kinnig 1 : kinniget gant burev ar Redadeg ha gant Meal Thepaut, kuzulier :

Cheñchamantoù kinniget : changements proposés :

✓ Cheñch Mellad 12

Meret eo ar gevredigezh « Ar Redadeg a di da di » gant ur C'huzul-merañ ennañ a 7 da 15 25 ezel dilennet gant ar Vodadeg-veur. Etre div Vodadeg-veur e c'hell ar c'huzul-merañ kendibabiñ izili 'zo hervez an ezhomou.

Dreistgalloud a zo gant mouezh ar genprezidanted e kenkaz ma vefe un niver ingal a vouezhiou a bep tu.

An divizoù a c'hello bezañ kemeret e-pad un emvod ordinal, dre votadeg, gant an izili a vo aze. Ne vo ket roet galloud votiñ ebet gant ar re ne vint ket en emvod.

Betek bremañ e oa 15 den d'ar muiañ er C'huzul merañ. Kinniget eo neuze brasaat an niver da 25. Ha kinniget eo bet ivez e vije ampar an niver a voter, evit ma ne vije ket hanter-hanter disoc'h ur votadeg.

Ouzhpennet 'zo bet ivez e c'hellfe ar c'huzul-merañ kendibab izili 'zo hervez an ezhommoù etre div votadeg veur, ha ne vo nemet ur vouezh a zo hepken evit ar genprezidanted.

Jusqu'à maintenant le conseil d'administration était composé de 15 personnes, il est proposé de l'élargir à 25. Il est proposé aussi que le nombre de membres soit impair pour que les résultats des votes soient toujours clairs. Il est rajouté aussi que les membres du conseil d'administration peuvent coopter des membres entre deux élections. Il n'y a qu'une voix associée aux deux présidents, mais elle est prépondérante en cas d'égalité de résultat du vote, ils devront donc se mettre d'accord sur les décisions à voter.

Tabut / Débat:

Ar c'huzul-merañ a dalvez kement ha kalon ar Redadeg, setu perak eo mat brasaat an niver a dud ennañ. Addispleget eo bet an doareoù emezelañ hag ar votadegoù d'an holl berzhidi (mellad 9). Divizet eo bet evit ar wech kentañ gant ar burev lakaat e pleustr ar mellad 9. Da lâret e rank bezan asantet gant ar c'huzul-merañ un emezeladenn bennak. Ouzhpenn-se evit un emvod-meur dreist-ordinal ne c'hall ket bezañ asantet un emezeladenn war ar prim evit votiñ, diboelleg e vefe penn da benn. Asantiñ doareoù d'ober e giz-se a c'hallfe lakaat ar gevredigezh en arvar.

Le conseil d'administration est le coeur de la Redadeg. C'est pourquoi il est utile de l'élargir un peu. Le principe d'adhésion à la Redadeg et des votes est réexpliqué dans l'article 9 que nous avons appliqué pour la première fois : Toute nouvelle adhésion doit être validée par le conseil d'administration. Il paraît logique que pour une assemblée générale extraordinaire il ne soit pas possible d'accepter des adhésions au dernier moment. Accepter ce mode de fonctionnement pourrait mettre l'association en danger.

Votadeg :

N'eo ket bet goulennet votiñ dre guzh, disoc'h ar votadenn / *Pas de vote à bulletin secret demandé.*

A-du : 21 a-enep : 0 neptu : 1

Kinnig 2, Kinniget gant Mael Thepaut, kuzuler er c'huzul-merañ.

Cheñchamantoù kinniget : changements proposés :

✓ Cheñch Mellad 2

« Ar re a c'hello tennañ gounid eus an arc'hantañ-se eo an holl aozadurioù a ra gant ar brezhoneg hag a gas anezhañ war-raok ha da gentañ penn ar gevredigezh Diwan, anezhi kevredad skolioù Diwan, en abeg d'he ferzh a bouez e treuzkasadur ar brezhoneg hag en askont d'he diaesterioù arc'hant, stag ouzh diorren he rouedad-peurgetket da skouer.

Ez-statudel e termener e vo roet da Ziwan 50% eus gounid ar sammadoù dastumet gant pep Redadeg, hag e vo ingalet ar peurrest eus gounid ar sammadoù dastumet etre raktresoù all hervez ar c'haier kargoù merket er reoleneg diabarzh. **Ingalet e vo gounid ar sammadoù dastumet etre ar raktresoù hervez ar c'haier kargoù merket er reolenn ziabarzh. »**

✓ Cheñch Mellad 11

Peurzivizet e vo implij hag ingaladur an 50% eus ar gounidoù a ya da raktresoù (n'eo ket lodenn Diwan) gant an Vodadeg-veur a-raok ma vo aozet pep Redadeg.

N'helle ket Mael Thepaut bezañ aze evit difenn e ginnig, kaset en deus ur postel d'en em zigareziñ ha displegañ perak en devoa kinniget ar cheñchamant statud-se. (cf postel dindan a zo bet lennet)

« Digarezit tudañ, n'on ket evit bezañ ganeoc'h hirio.

Kinnig a ran lakaat ul lodenn eus ar mellad 2 eus ar statudoù er reolenn ziabarzh evit ma kloto gwelloc'h statutoù ar Redadeg gant ar pezh ez omp, a soñj din.

Paliou ar Redadeg eo 1) bodañ holl vrezhonegerien ar vro en-dro d'un darvoud boutin, ha 2) dastum arc'hant evit skoazellañ raktresoù e Brezhoneg, forzh peseurt raktres a vefe. (lod a lako ar paliou en urzh all, ket me)

Ar raktresoù a zo 2 stumm dezho : stumm 1, raktresoù dibabet gant Kuzul ar re fur ; stumm 2, Diwan.

An doare-se eo **dibab** ar Redadeg abaoe pell. Met n'eo ket **natur** ar Redadeg.

Setu perak e kinnigan cheñch ar statudoù hag ar reolenn ziabarzh. (da gas soñj : reolenn = penaos ober ; statut = piv omp)

N'eus ket anv amañ eus daoust ha mat eo Diwan hag an hentennoù all pe get, daoust ha mat eo reiñ arc'hant da Ziwan pe get, just eus petra eo ar Redadeg bremañ.

Forzh pe dibab a vo graet ganeoc'h a vo mat din, rak an izili eo a ra ar gevredigezh forzh penaos.

Kenavo ha kalon ! »

Mael Thepaut, ne pouvant être présent pour défendre sa proposition il a envoyé un mail pour s'excuser et expliquer pourquoi il a proposé ce changement de statut.

Tabut / débat

Ne vo ket difennet ar c'hinnig gant ar burev dre ma n'eo ket kinnig ar burev. Chalet eo bet perzhidi an emvod dre ma ne oa ket an hini en deus kinniget ar c'hinnig aze evit difenn anezhañ.

Kaoz a zo bet eus natur ar Redadeg, he darempredoù gant Diwan, ha pouezh Diwan evit ar brezhoneg.

Menegiñ Diwan er statudoù a c'hellfe bezañ chalus evit ar c'hehentiñ, ha chom hep reiñ c'hoant da gevredigezhioù pe skolioù all kemer perzh er Redadeg.

Met meneget 'zo bet ivez e c'hellfe ar c'huzul Merañ cheñch ar reolenn diabarzh aresetoc'h evit ar statudoù.

Pal ar Redadeg : lakaat ar brezhoneg da vont war raok ha plas Diwan evit kement mañ a zo sklaer. Ha war ar memes tro eo distag ar Redadeg eus Diwan, ha digor d'an holl. Ar reolenn diabarzh a zo graet evit kement-mañ ivez.

Goude an eskemmoù-se, ha diwar fed oa tud Diwan en emvod, eo bet lakaet war-wel e vije a-bouez evit an div gevredigezh eskemm war an tem-se ha war pep tra evit mont war raok, gallout ijinañ traoù asambles evit mat ar Brezhoneg..

Cette modification des statuts n'est pas soutenue par le bureau et n'est pas une proposition du bureau de l'association. Des participants à la réunion sont déçus que la personne qui a fait la proposition ne soit pas présente. Il est question de la nature de la Redadeg, des relations de l'association avec Diwan et de l'importance de Diwan pour la langue bretonne. L'idée générale est qu'attacher Diwan aux statuts peut être gênant pour la communication de la Redadeg et peut empêcher certains de s'y joindre. D'un autre côté mentionner Diwan simplement dans le règlement intérieur peut fragiliser sa place car le règlement intérieur peut être modifié plus facilement.

Le but de la Redadeg est de faire avancer la langue Bretonne donc la place de Diwan dans tout ceci est claire. Par ailleurs la Redadeg est nettement distincte de Diwan, elle est ouverte à tous. Après les échanges, et du fait de la présence de représentants de Diwan dans la réunion, il est convenu que les deux associations organiseront un moment d'échange pour aller de l'avant et pour le bien de la langue Bretonne.

Votadeg :

N'eo ket bet goulennet hen ober dre guzh. / *Pas de vote à bulletin secret demandé.*

A-du : 0 a-enep : 19 neptu : 3

Kinnig 3, gant ar Burev

Cheñchamantoù kinniget : changements proposés :

✓ Cheñch Mellad 2

Ar re a c'hello tennañ gounid eus an arc'hantañ-se eo an holl aozadurioù a ra gant ar brezhoneg hag a gas anezhañ war-raok ha da gentañ penn ar gevredigezh Diwan, anezhi kevredad skolioù Diwan, en abeg d'he ferzh a bouez e treuzkasadur ar brezhoneg hag en askont d'he diaesterioù arc'hant, stag ouzh diorren he rouedad peurgetket.

Ez-statudel e termener :

- eo pal-pennañ ar gevredigezh ingaliñ an argant dastumet dre argantiñ a-stroll kilometroù pep Redadeg hanter evit Diwan ha hanter evit raktresoù all hervez ar c'haier kargoù merket er reoleneg diabarzh.

e vo roet da Ziwan 50 % eus gounid ar sammadoù dastumet gant pep Redadeg, hag e vo ingalet ar peurrest eus gounid ar sammadoù dastumet etre raktresoù all hervez ar c'haier kargoù merket er reoleneg diabarzh.

- e klaskay dizehan ar gevredigezh argantiñ he monet en-dro dre hentoù arall, él ar mesenerezh, ar profoù argant pe ar yalc'hadoù a c'hellahe kaout.

- e vez termenet an dasparzh argant-se er reoleneg diabarzh hag e vez resisaet e implij get ar C'huzul-Meriñ e penn-kentañ aoziñ pep Redadeg.

✓ Cheñch Mellad 11

Peurzivizet e vo implij hag ingaladur an 50 % eus an argant dastumet dre argantiñ a-stroll kilometroù pep Redadeg ar gounidoù a ya da raktresoù (n'eo ket lodenn Diwan) gant ar Vodadeg-veur a-raok ma vo aozet pep Redadeg.

Tabut / Débat:

Termenet e vo an traoù ar resisañ ar gwellañ er reoleneg diabarzh.

Ar pal eo kempouezañ ar budjed ha dont a benn da reiñ an arc'hant rastellet gant ar c'hilometroù gant ar Redadeg. N'omp ket deuet a-benn evit poent, ur pal a glaskomp tizhout an hini eo. Dav eo kempouezañ ar budjed evit mont en dro ha padout.

E penn-kentañ prientiñ pep redadeg e vez votet ar budjed en emvod-meur ha pal eo dont a benn da arc'hantiñ ar mont en dro gant mesenerezhed, ha gwerzhoù all, ha n'eo ket ar c'hilometroù.

Kinniget eo bet reiñ ur c'houst huelañ (« seuil ») kuit d'ar redadeg koustañ re ger un deiz bennak.

Dav 'vije neuze kavout arc'hant dre hentoù all.

Ar statudoù a zo bet graet evit bezañ doujet hag aze e vije bresk da geñver lezenn lakaat palioù re resis er statudoù.

Sevel a ra ar gudenn kaout meneg eus ar reoleneg diabarzh a vije da cheñch gant ur strollad labour a vo krouet evit ober kinnigoù a vo kadarnaet pe get gant ar reoleneg diabarzh. Start eo votiñ hiziv war-se ma oaromp e vo cheñchet ar reoleneg diabarzh.

Mat vije neuze sklaeraat ar ger « gounidoù ».

Les modalités plus précises de répartition des fonds seont déterminées dans le règlement intérieur de manière aussi précises que possible.

Le but est d'équilibrer le budget et de réussir à redistribuer au mieux l'argent récolté par la Redadeg. Nous n'y sommes pas arrivés aussi bien que nous le souhaiterions jusqu'à présent, cela reste un but à atteindre. En effet, il faut aussi disposer d'un budget de fonctionnement et durer. Ce budget est voté en Assemblée Générale après chaque Redadeg, il conserve une proportion du bénéfice pour organiser la Redadeg suivant.

L'objectif vers lequel nous tendons nos efforts est de financer le fonctionnement courant par les mécénats et les partenariats, les ventes et autres ressources supplémentaires pour que la vente des kilomètres soit entièrement redistribuée.

Il est proposé de fixer un seuil afin d'éviter que la Redadeg ne coûte trop cher un jour. Il faudrait dans ce cas récolter de l'argent par d'autres biais.

Les statuts sont fait pour être respecté et mettre des seuils trop précis dans les statuts pourraient fragiliser le fonctionnement.

Quelqu'un signale le problème du règlement intérieur qu'il faudrait changer avec un groupe de travail qui sera créé pour cela. Il est un peu gênant de voter aujourd'hui dans la mesure où le règlement intérieur nouveau n'est pas connu. Ce serait bien dans le règlement de préciser ce que l'on entend pas « gains. ».

Votadeg :

N'eo ket bet goulennet hen ober dre guzh. *Pas de vote à bulletin secret demandé.*

A-du : 16 neptu : 6 a-enep : 0

Echu an emvod-meur dreistordinal da 1e goude merenn. La séance est levée à 13h.